



Pedadenn

Ofis ar Brezhoneg zo laouen ouzh ho pediñ
d'an emvod ma vo kinniget deoc'h :

Diagnostik stad ar brezhoneg e Bro Montroulez

**D'ar Gwener 19 a viz Meurzh 2010, da 6e abardaez
e Montroulez, e ti Skol Vreizh, 41 kae Leon**

(bet savadurioù ar Manu)

E 2004 e oa bet savet diagnostik kentañ Bro Montroulez. C'hwec'h vloaz goude ez embann Arsellva Ofis ar Brezhoneg un diagnostik nevez a ziskouez hag a zielfenn emdroadurioù stad ar brezhoneg er vro-mañ.

Kement dachenn a denn d'ar yezh a zo bet studiet : an deskadurezh er skolioù, ar c'heleñn d'an dud deuet, an dudi, ar vuhez publik...

Laouen e vefe tud an Ofis oc'h eskemm ganeoc'h war an emdroadurioù liesseurt a c'heller merzout o tielfennañ ar mankoù a chom c'hoazh koulz hag an araokadennoù, a-benn kompren mat e pelec'h emañ an ezhommoù ha penaos respont dezho.

OFIS AR BREZHONEG

Ti ar Vro – hent Jean Monnet - 22140 KAWAN

☎ 02 96 49 12 08 - ✉ ofis22@ofis-bzh.org